

SON AN TEODOU FALL

(Son ha ton névez)

I

Eur son a zo compozet a névez
Ag a zo tout ar vrionez
Divarbenn an téodou fall a zo
E parréz Kastel a tro war dro.

II

Pell zo dija em boa klévet ano
E zoa téodou spountuz er vro
Mez jamez seurt ne mije bet krédet
Ken a zoun éat wardro ar merc'hed.

III

Pa vez gwélet dabu zen c'hénem garet
Déostu é vézont dikriet
Klévet e vez an téodou jalouz
Etrézho e klask lakat an trouz.

IV

Pa vez gwélet assemblez tud yaouank
E pourmen o c'halon gouñtant
Dont a réont digor braz o ginou
Buan da zellet en ho dorjou.

V

En dervez ma vez en eured er vro
Méuz vez gwéled anézho
Gwéled o vézont é tont d'ar porchet
Digor braz o ginou da zellet.

VI

Né zoun ket vit disonjol euz merc'hed
Zo gant an dud ken occupied
Propoc'h vé dézho kempen mad o zi
Vez è vrèina gant a loustoni.

VII

Jamez meuz klévet den o lavaret
Gant an dud a vijé meulet
Neuz német pa vézer vont da vervet
E vézer meulet a vouez huel.

VIII

Led mañ e vé lakat kréis ar blacen
Eun dervez bennag eur vézen
A kenta téod louz a vijé klévet
Dirak an holl dud vijé krouget

IX

Neuzé me gav din da va zantimant
E Kastell vijé chenchamant
Sétu aze ar voïen vad a zo
Da gass an téodou fall euz ar vro.

X

Neuzé pa vijent holl disparisset
Béteg eur gwez e vijé klévet
A labouset kaba a vouez huel
Pégen kaer éo ar vro a Gastell.

FRANCIS MOAL

(Reproduction interdite)